

(10)

Al Louarn hag ar C'had .

Var ar memes ton .

Eur mastin du , dre eur bod lañ  
 A velas eur pardervez  
 Eur C'had yaouanq hag eul Louarn  
 O vont en hent asambles ;  
 Ne allas get mont dezge tost,  
 Evel ma falle dezàn :  
 N'en devoe nemet c'hoez ar rost,  
 N'en devoe tam anezàn .

Al Louarn hag ar C'had dibot  
 N'en em greont asambles ;  
 Al Louarn en deus eun defot,  
 A zo bezja didruez :  
 Ar C'had , er c'hontrol , ne voar get  
 An doare da gombati ,  
 Hag evelic e ve paqet ,  
 Maleur a êru ganti .

(11)

An daou - ma goucoude a ya  
 Lazi ato asambles ;  
 O quelet a rer o c'heulla  
 Ar memes kenchou bemdez .  
 Arvizion adreus ar parcou ,  
 Arvizion dre 'r prajeyer ,  
 Hag arvizion dre ar c'hoajou :  
 An dra - ma ne get g'evier .

E lavaret e vent qerent  
 Hag eus ar memes toreat ;  
 Mes an natur e deus e hent ,

116

Terri a rai o bareat ;  
 Rac, pa drec'her hent an natur,  
 Ne deas get pell da goeza,  
 Ha pa zonyer beza asur,  
 Oar tost d'al lam diveza.

(12)

Alafin ar Chasseerien,  
 Gant o chas ha livrini,  
 A ra anezo meryerien,  
 Hep ma c'hall achap hini.  
 Setu frêzet an union ;  
 Onnez eo ar galonat !  
 Goude beza bet qer mignon  
 Troc'het camic d'an ebat.

(Vol. II, p. 10 - 12.)